

12.

M'ar kollan ho sonj, ô Mari,
Ra vo skoët va izili,
Ra vo va zeod holl dizec'het !
Ma n'ho meulan, ô Mamm garet !

13.

Keit 'ma vo bruk er menezioù,
Ha dèro stard en hor c'hoajou,
En hor c'halon ho karantez
A vo birvidik da jamez.

14.

Kristenien vad a Vreiz-Izel,
Pedit, pedit en he chapel,
Hag e dôr aour ar Baradoz
E vo laouën ouz ho kortoz.

PERMIS D'IMPRIMER :


Quimper, le 15 Février 1889.

Em. FLÉITER,
Vic. gén.

E chapel Intron Varia Kergoat ez' euz daou Bardoun : ar
c'henta da zul ar C'hasimodo, hag ar Pardoun braz da zul goud'
an Assomption. Ar bëlerinet a c'hell gounit eun induljans plenier
o kovez, o kommunia, hag o lavaret pemp *Pater*.



Kemper, moullerez an-Eskopti.



Chapel Intron Varia Kergoat

Kantik

INTRON VARIA KERGOAT

E PARREZ QUÉMÉNÉVEN

Ton : *Intron Varia Rumengol.*

DISKAN :

*Intron Varia Kergoat,
O patronez ken dous, ker mad,
Er bed-ma roit d'eomp ho pennoz,
Hag er bed-all ar Baradoz !*

1.

Salud, verelaouën skeduz,
Salud, lilien dudiuz,
Salud, salud, Güerc'hez dinamm,
Salud, hon Intron, hag hor Mamm !

2.

Koant e tigor var ribl ar ster
Ar rozen d'an nevez amzer,
Ha c'houi, flourdilizen an Êe,
Zo pur ha kaër e pep mare.

3.

An durzunel hag ar golvan
A gav eun neiz d'ho re-vihan ;
Mez ho chapel, Mamm benniget,
Setu va neiz muia-karet.

4.

Bep bloaz d'hor bro guiniliet
O tont eürüz a vez guelet,
Bep bloaz, bemdez, ho tud fidel
A zired eürüz d'ho chapel.

5.

Gant he zaë mein dantelezet
'Vel eur rouanez eo guisket :
Kaëroc'h chapel, hervez an holl,
Ne z'euz nemet e Rumengol.

6.

Var an Thabor eme sant Per
Mad oa beza gant hor Zalver,
Mad eo d'eomp ive chomm ama
Dirak hon Intron Varia.

7.

Dous eo d'eur vamm deiz he gouël
Skuill he beñnoz en he chapel,
Skuillit 'ta var ho pugale
Puill ho pennoz euz bâr an Êe.

8.

Roit, Mari, d'an dud seyzet,
Roit levenez, ha yec'het :
E kreiz ar mor, e kreiz an dour,
Mari, bezit ouz hor sikour.

9.

Goazed, merc'hed o tiwoda
Dirazoc'h a voar daoulina :
Ni ho ped, Mamm garantezuz,
Outho' grit eur zell truezuz.

10.

Pell ato diouz Quéménéven
Kasit ar c'hlenvet, ar voçen,
Ha diouz an tân, diouz ar pec'het
Hon diouallit, Güerc'hez, bepret.

11.

Selaouit, m'ar plij, hor peden,
Da bep-unan roit he c'houlén,
D'an dud yaouank buez vertuzuz,
D'an dud koz maro evurüz.